

Mari Beg araog

Mar o peud c'hoant, ma mignonet, da hanvezout eur vreg rôg,
Me o kunduso pa gersfet dirag Mari Beg araok :
Bemde war dro eun heur-anter e kluch war dreujou he dôr ;
Kerkent teodou pig ar c'hartier gant eur skaon pe eur gador
A zired holl en he c'hever : An odianz 'so digor.

War barlen Mari a weler eun tanfoeltren asîet
War behini 'kont pep komer kement a deuz invantet :
Klêvet a vo ped den lipouz a ya bemde d'ar c'hafe ;
Ped plac'h a deuz tri amourouz, ha ped all 'zo stad henne,
Ha ped ozac'h 'so den taugnouz, ped all a bil ho grage.

Mari Beg araog a gomant war ar c'honseil divragou ;
Hep kaout an neubeuta damant e tigor frank he genou !
Pa ne devez war he bizach na moustachou na baro
Eo red dei kaout an avantaj da zikrial tud he bro :
Gêwier, sotoni, kos langach ; tud a bep kalite 'zo !

Mari Beg araog 'zo titret 'vel an hùella noblanz ;
Domaj na n'eo ked demezet d'eun den penvidik a Franz :
Hi ão prinsez an diêgi, komtez al liboudennou ;
Hi ão dukez al loustoni, markizez ar strakellou,
Gouarnerez ar jolori, ha baronez ar pillou.

Kerkent a ma vez embannet daou zen yaouank da zemi,
A vez d'al lun vitin galvet he c'honseil braz gant Mari :
Pep konseiller en gweleden a boangn gant he voutou bêr
Evit klask ar gwella moyen da derri prim an affer ;
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goaz a zo mœoyer.

Ar re wasa da zikrial an dud a ya en fortun
A zo evit an ordinal merc'het chomet hep nikun ;
Merc'het kaez chomet da goza hep tapout eun tamik goaz
Hag a deu breman da facha dre ma na deu den d'o choaz
Prest da lampet gant ar c'henta a dostaffe deze c'hoaz !

Kerkent a ma wel eun eured o tont tresek an iliz,
Mari Beg araog a zired en manchou louz he c'hinviz ;
Evel eur vioc'h o vresken e c'haloup a biou ar ru :
Holla ! Katel, Jannet, Pêrin, Soaz, Mac'harit, deud dustu ;
Setu êru euret Martin, deomp da dremen ar rêvu ?

Ma c'homer sellit deuz honez, dislivet he davanjer,
He c'horneten 'zo hep ampez, he gweleden kalz re vêt ;
O ! sellit-ta deuz an den-man pegen striz ão he vragou,
He dok 'so brasoc'h evithan, ha kalz re hir he voutou ;
Eur golinêten 'zo gantan war he rochet en pillou !

Pa renk d'eur vreg kaez gwilloudi diwar he bugel kenta,
Raktal e lavaro Mari. « petra nao miz 'so dija ?
« Me gred e oa bed an euret en deiz war lerc'h pardon Paol,
« Ha pask nê ked c'hoaz êrûet, allaz ! gret o d'eo an taol ?
« Heb no dewa ma c'hemennet, ha kement-se 'gavan drol ! »

Pa glêo kloc'h iliz ar barrez, o c'hervel d'eur vadiziant,
Mari gant eun troad hep boutez a c'haloup araok ar chant ;
Met evel na neuz ket ezom demeuz eur vouez ken raouyet,
Da zikour kana tedeum evit an neve c'hanet,
Gant he c'homerezet 'renk chom en kichen dor ar porchet.

V. P. C. C. (1)

(1) L'auteur de cette vieille chanson populaire reste inconnu ; mais ce qui est certain c'est qu'elle est antérieure à l'âge de Prosper.

Ch. ROLLAND.

Couplet complémentaire

Dre holl, me gred, e m'an Mari o c'hoari war an dud all,
Boutet he fri butun ganti barz en kement affer fall ;
Beteg en toul an dorjou c'ha da jilaou deuz an noz,
C'hoant dei goud an holl doareou 'vit hellout asten ar gaoz ?
Gant an hast da gonta klinkou, Mari flao deuz tam renoz !

Ch. R.